



CANTIC SPIRITUEL

K VAR AR BURETE.

Var eun ton nevez.

SE LAOUIToll, tudyauanq, eurguelennadurez,
SA so meurbet profitabl vit ho silvidiguez,
Da viret ar Burete evel ma zeo dleet,
Da Jesus, güir Vab Doue, Priedar Güerc'hezet
Calz a glêvo ar Verz-mâ, hac a vezo fachel,
Balamour d'ar virionez zo enni diclêryet :
An den clân e zaoulagad n'efl qet sellet an de,
Nac ar re a zo coupabl clêvet ar virione.

Ar sujet eus ar Verz-mâ eo ar frajilite
Demeusar merc'het yaouanq re scàn v a volonte :
Allas! güelet rêr gante alies glac'haret
O zadou hac o mamou, goude o beza maguet.

Ar re a zo vertuzus n'en em offañcont qet
Vit laret ar virionez d'ar re zo imparfet :
Doue a gommand qelen ar re oboissant,
Ha fixa bars en hent mad ar re zo variant.

Allas! pelec'h m'an amzer ma voa'r merc'het
contant

Da exposi o c'horfou d'ar maro, d'an tourmant?
Güell vize ganto beza losqet ha merzeriet,
Qent eguet e nep fêçon offansi o güerc'hdet.

Pa annonças Gabriel d'ar Verc'hez gloriüs
E voa choaset gant Doue da veza Mam Jesus,
E laras d'en em excus penos ne vise qet,
Mar bise dre an dra-se offancet he güerc'hdet.

Ne zeus tra var an douar a vez a vrasoc'h pris,

Ma carremp consideri, eguet an honestis ;
 An oll'aour, an oll'arc'hant, hac ar mein precius,
 E comparèson dezi a so traou disprizus.

Pa vez collet an arc'hant hac ivez al leve,
 Gant poan a zo c'hoas moyen d'o gounit adare ;
 Mes mar collit hoc'h enor, ha fallout e recur,
 Qement den a zo er bed n'allint qet ho sicour.

Enor ar merc'het yaouanq zo evel eur veren,
 A zo facil da derri, pe evel paper güen,
 Pehini gant eur blueu goude beza scifet,
 E vit poannia e voelc'hi james ne ve grêt net.


Gréomp c'hoas comparèson ouz ar fourdilisen
 Hac an ténzor precius, enor ar fumelen :
 Ar fourdilis so brillant pa zeuer d'o sellet,
 Mar o zoucher gant ar bis, e collont o guenet.

Allas! siouas, tud yaouanq, pa brometer deze
 Comzou caer, fidelite, ha peb seurt carante,
 A zo facil da gredi, qen a vezint tromplet,
 Ha goude pad o buez e chomont glac'haret.

Lucifer a bromete da Èva, da Adam,
 E vit débri eus ar frouez n'o devise nep blam ;
 Allas! hac e voent tromplet : hac evelse bremâ
 E tromplet o bugale dre lies promessa.

Allas! gant an den yaouanq zo preisan ærouent
 Goude glac'hari o zad, o mam hac o c'herent,
 Pa na gueront conservi dreist pep tra o enor,
 A zo calz preciusoc'h eguet cant mil ténzor.

Allas! an tad hac ar vam a vo ivez daouet
 Balamotr d'o bugale, pa n'o c'horrijont qet :
 Evel an douçder ar frouez a reputer d'ar güez,
 E zeo d'an tad ha d'ar vam buez ar vugale.



Ar blantenn pa vezyaouanq a bleggant pep avel,
 Evit e derc'hel eün e zeo ret he sevel;
 Evelse ar yugale, ma na vent corrijet,
 A blego dindan ar bec'h an natur corrompet.

Rac-se, tadou ha mamou, pa oc'h eus bugale,
 Mar fell dec'h beza divlam abalamour deze,
 Na lezit-y qet da vont da nep seurt assemble
 Na vo unan ac'hanoc'h, pe o c'herent gante.

Ne zeus den var an douar a nep seurt qalite,
 Ma na gar laqat evez, na gollo e ene;
 Liessoc'h a zrouc-speret a zo o tarnijal,
 Eguet zo a guellienen var dro eun aneval,
 Ne zeus na foar na marc'hat, pardon na nep
 andret

N'en em gav ha Lucifer hac e gamaradet,
 Eguis bleizi ar rajet pere a zo subtil
 Da drompla an dud yaouanq pere a zo frajil.

O lezel an dud yaouanq re en o liberte,
 Eus o mesur discredet gant re a vanite,
 E roer sujet deze d'en em rēi d'ar pec'het,
 Difficil eo n'em viret pa vezer commancet.

Ar Roue an oll furnez en deveus lavaret,
 Nep a gar re bugale a vezo glac'haret;
 Rac deiz ar Varz jeneral hep mar o devo blam,
 Pa rēi bugale daonet mallos d'an tad ha mam.

Meho conseil, tud yaouanq, da viret chastete
 Evit renta Jesus-Christ amourous hoc'h ene,
 En em gonsacrit dezàn hac e vezot eürus;
 Biscoas ne voe servicher ha qer carantezus.

Jacob, evit eureuji merc'h an ingrat Laban,
 A chomas ahet seiz bloaz er fatiq hac er poan :

Jesus zo deut er bed-mâ d'eureuji eur vestrez,
En deus, balamour dezi, finisset e vuez.

Satan clàn hac anvius o velet omp choaset
Da bossedi ar plaç caër en deus dregloar collet,
Mar gall hon laqai da goll eun tenzor precius,
Evit ma facho ouzomp hon Redemptor Jesus.

Mar fell d'êc'h beza divlam, n'en em gavit
nepret

An eil sex gant eguile assambles da brezec,
Rac an occasionou a zo re danjerus,
Nep en deus o approuvet a zo bet maleurus.

Na ouffeden toucha pegnave'zaouarn souillet,
Na qerzet var glaou tân ne vo e dreid poaset;
Evelse an dud yaouanq an eil gant eguile,
Pa ve Sent'ha Sentezet, e offañcont Doue.

Den n'en deveus ar furnez en devoa Salomon,
Nac ivez qement a nerz evel en doa Samson.
Evit o nerz, o furnez, e zint en em gollet;
Nep a gred ar virionez, a velo dre effet.

Elec'h laqat ho corfou e fatic hac e poan,
Mar chomit hep exerciç, ec'h arruo Satan
Da invita, da laqat traou sot en ho calon,
Ar güir voyen da drec'hi eo yun hac orêson.

Mari Egyptianes ha Mari-Madalen,
A gnduas eur poulsat eur vuez disordren,
Ha penevert ar gasti e rezont d'o c'horfou,
E vent bremâ o lesqi e creiz an ifernou.

Pa oa'n Autrou Sant Anton ebars en ermitach
O combati ouz Satan oüntàn leun a arrach,
Pa voa en e orêson, e save avichou
Evit ober exerciç, rêi e gorf d'ar poaniou.

P'en em gav daou zen yaouanq an eil gant
eguil,

Sònjont emedi Doue presant en o ene ;
Merqaraan ollœuvrou, comzou, sònjezonou,
Varben ma zaïnt dirazàn da rent a o c'hontchou.

Sònjomp ouspen er stravill a vezo o clêvet
Mouez trompillou an Ælez, pa finisso ar bed,
O soumeti pep-unan d'en em gavet presant ;
Den n'allo beza exant evit aour nac arc'hant.

Petra rai ar bec'herien pa vezo digoret
Al leor eus o c'houstianç o devezo scritfet ;
Pa vezo grêt hor setanç, divezat vo gouela,
Divezat vezo neuze fallout he c'horrija.

Mar deu goal sònj ergalon, goulennit diouti,
Goude plijadur ar bed hac hi allo souffri
An tân grevus en ifern, pa ne allomp amàn
Anduri var hor c'hroc'hen eur fulennic bian.

Un Ermit, sollicitet d'eur pec'het dishonest,
Ganturfemelen mechant, en em divisqas prest
Hac en em stringas en tan, o lavaret dezi :
Aprovomp erecompançgent monet da bec'hi.

Erfin, laqit evez mat ouz ho santimanchou,
Ho pemp sqiant naturel ; ar re-se ho tougo,
Ma na guerit dioüal piz, da souilla hoc'h ene,
Evel ma eure David güechall gant Bethsabe.

Qeita ma zomper bed-mâomp e danjer bepret,
Abalamour d'hon natur zodouguet d'ar pec'het ;
Ar gombat a zo livret etre Satan ha ni,
Ret eo deomp-ni caout couraj, mar fell deomp e
drec'hi.

Petra sònj ar bec'herien, evit daou na tride

O deus da chom er bed-màn, coll an eternite,
 Hac int oc'h allout beza corf hac ene contant
 Er barados da vigen, hep anui na tourmant.

Clêvet oc'h eus ar voyen, mar querite miret,
 Evit en em brepari da gaout da bried
 Jesus, mar en desirit, ma na ellit gortos,
 Er Sacramant an Auter e cavot ho repos.

CANTIC VAR AN IMPORTANÇ EUS AR ZILVIDIGUEZ.

PETRA servicho da eun den
 Oll gloar ha poumpou monden,
 Hac e ve mestr var ar bed oll;
 Mar da e ene, siouas, da goll!

Peta servicho dit, den avaricius,
 Da aour, da oll arc'hant, da denzor precius?
 Pa vez da-unan mestr er bed universel,
 Mar couez da ene paour er flammou eternal?

Var ar bresañ a Zoue.

Mar oc'h eus c'hoant da goumetti eur pec'het,
 Clasqit eur plaç a vezo cuz ha secret,
 E pehini Doue n'ho quelò qet,
 Hac eno grit hardis ar pezh a gneret,

In manus tuas.

Etre ho taouarn, va Doue,
 E recommandàn va ene :
 Va Doue, c'houi oc'h eus va frenet,
 Ma n'en deus chenchamant ebet,
 Na vet qet caus mar ben collet.

A enep ar fals mignonet.

E prosperite pa vezet,
 Ho pezo nombr a vignonet;

Mes mar bes ar rod ar fortun
Control d'êc'h, n'hô pezo nicun.

Var an doujañç Doue.

Doue en deustreid plom, n'en em hast tam ebet
Da bunissa crimou ar pec'her obstinet
Dioüallomp gouscoude, ouarn eo e zaou dorn,
Pa en deus hir gortoset, e crog bete'n ascorn.

Var an heur incerten eus ar maro.

Pa he ouzoc'h qet ar plaç, an heur hac ar
moment

Gant ar maro traitour ma veot attaquet :
Gortoit-hi e peb plaç e peb heur ha moment,
Evelse c'houi a viro ma vezot surprenet.

Var ar memes sujet.

Ma ouffac'h evit certain n'o pe qen an amzer
Da veva var ar bed-mâ nemet eur mis antier,
C'houi ho pe regret certain da veza implijet
Hoc'h amzer da gundui eur vuez debordet.

Hagouscoude e c'hoarzit hep sonjal tam ebet,
N'oc'h eus qet nac eur moment nac eun heur
assuret ;

Marteze abars an nôs allae'h beza jujet
Hervez ho merit, d'an tân pe d'ar gûir joaustet.

Var ar goal Cōvession.

Credit certain hac assuret,
Ma na zeus chenchamant ebet
Ne dal tra ho cōvession ;
Rac-se dioüallit, va mignon.

Orêson a enep an teir goalen a gasti.

Ni ho suppli, ô va Jesus !
Dre hoc'h hano carantezus,
Da gass pell diouz hor c'harter

Qernes, ha bocen, ha brezel.

Oréson da Sant Gueltas.

Autrou Sant Gueltas, c'houic'heuseurgallout
bras meurbet

Digant Doue a enep an oll chaç arraget,
Preservit e peb amzer ho cüir servicherien
Dious chaç clàn, hac ivez dious peb seurt anqen;
Ni ho ped hac ho suppli eus a greiz hor c'halon
Dachasseal ar voalen-se pell dious hor c'hanton.



CANTIC VAR AR *MARIA MATER.*

O Guerc'hez Vari, Mam a c'hraç,
Ha mam a druez e peb plaç,
E peb amzer hor preservet
Pur ha net diouz peb pec'het,
E peb amzer hor preservet
Diouz griffou an drouc-speret.

En heur ar maro pa vezimp,
Guerc'hez Santel, roit sicour dimp;
Neuze recevit hon enè,
Ha presentit-hi da Zoue.

Rentomp gloar da Zalver ar bed,
Zo bet gant ar Verc'hez ganet :
Rentomp gloar d'an Tad Eternel,
Hac ive d'ar Speret-Santel.

Ra vezo Doue hep fin meulet
Gant an oll Zent hac an Ælet :
Ra vezo meulet hep paoues
Brema, hac er fin da james.



FIN.

AD MAJOREM DEI GLORIAM.

Montroulez, Impr. LÉDAN, e traon ru ar Yur.